

**Hon Tad :** hag a zo en neañ, hoc'h anv ra vo santelaet, Ho rouantelezh degaset deomp, Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañ.  
Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek, Pardonit deomp hor pec'hedoù, 'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp, Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion, Met hon diwallit doc'h an droug.

*Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue, ... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :*

**R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh, ar gelloud hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.**

**Oan Doue :** Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : ho pet truez doc'homp ! (x2)  
Roit deomp ar peoc'h !

**Kent ar gomunion :**

*Ar beleg : Setu Oan Doue, setu an Hini a lam pec'hed ar bed :  
Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.*

**R/ : Man Doue, ned on ket dign ma tait davedon,  
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.**

**Komunion :** 1 Meulit an Aotrou Doue, C'hwi holl, e draoù krouet,  
Traoù hag a weler splann, traoù ha ne weler ket,  
Meulit e holl gelloud hiriv, àrc'hoazh, bemdez,  
Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !

2 Meulit an Aotrou Doue, holl Sent ha Santezed ;  
*Apostoled gredus, Merzherion, Gwerc'hez ;  
Duhont er Baradoz, lârit ho levenez,  
Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !*

3 Meulit an Aotrou Doue, Arc'haeled hag Aeled  
É chom e lein an neañ, e palez an Dreinded !  
Get ho telennou aour, lârit kanenn an Ne,  
Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !

4 Meulit an Aotrou Doue, àr ho tron lugernus,  
*E mor bras ar splannder, e-tal ho Mab Jezuz,  
Gwerc'hez santel Mari, kanit ho karantez,  
Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !*

**Kan-dibenn :** Àr ar Vretoned, Mamm a garantez,  
Taolit ag an neañ ur sell a druez. (2 wezh)

Gwelet hoc'h eus int tolpet a vostad

E Santez-Anna, dirak ho Mamm vat.

Dait da Vreizh-izel : eno pep Breton,

'Vel santez Anna, ho kar a galon.



**Bep sul ketañ ar miz :**  
overenn da 10e30 e chapel ar Werc'hez.

# Parrez Ker Anna

## An Treuzneuziadur

6 a viz Eost 2023

« *Hemañ eo ma mab a garantez. Selaouit-eñ.* »

**Kan digor :** Tremenet eo an noz, splanniñ a ra an deiz,  
Me 'glev holl an evned é kaniñ gloar da Zoue ;  
Sevel a ran mam bouezh get hini an evned.  
'Veit kaniñ en enor da Zoue, Kroueour ar bed.

C'hwi hoc'h eus a netra ma zennet, o man Doue !

Etre ho torn emañ ma marv ha mam buhez,

Ha rak-se e roan deoc'h an deiz a gomañsan ;

En imple 'veit ho kloar a-bezh-kaer e vennan.

Plijet geneoc'h àrnon evezhiat e pep eur

Ha pellaat azoc'hon, en deiz-mañ, pep dañjer ;

Dreist pep tra, o ma Zad a zo e lein an neañ,

Doc'h velim ar pec'hed, gwarantit ma eneañ.

C'hwi a wel an dober am eus ag ho sekour,

Roit enta ho pennozh d'am foan ha d'am labour

D'am c'horf ha d'am eneañ, roit hiniv o bevañs,

Ha be(zi)t C'hwi-mem un deiz en neañ ma c'hoñfortañs.

**Salud d'ar bobl :**

*Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad  
hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl :*

**Respont : Ha get ho spered !**

**Kyrie** (Ordinal hervez ton gwerz Skolan)

**Gloria : Gloria ! Gloria ! In excelsis Deo !**

**Et in terra pax omnibus bonae voluntatis !**

Ho meuliñ a reomp. Ho trugarekaat a reomp. Hoc'h adoriñ a reomp. Enor deoc'h a ganomp ha mil bennozh aveit ho kloar hep par. Aotrou Doue, Roue an Neañ, Doue an Tad hollgellougek.

*Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz. Aotrou ha Doue, Mab an Tad. C'hwi hag a lam pec'hedoù ar bed, ho pet truez doc'homp. C'hwi hag a lam pec'hedoù ar bed, degemerit hor pedenn. C'hwi hag a zo azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez doc'homp.*

Rak C'hwi hepken a zo santel. C'hwi hepken a zo Mestr. C'hwi hepken a zo uhelmeurbet, Salver Jezuz, Get ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen !

## Lennadenn getañ : Lennadenn tennet ag ar profet Daniel

Un noz, 'vel ma oan get ur weledigezh, me, Daniel, a oa é sellet : renket e oa bet troniou hag un den kozh a azevas ; e zilhad a oa ken gwenn 'vel an erc'h, ha gwenn kann e vlev àr e benn 'vel gloan naet ha pur a bep louteri. Flamm-tan e oa e dron, glaou bev ar rodoù anezhañ. Ur ster a dan a rede hag a darzhe diraktañ. Mil milierad er servije, ha dek mil a vilieradoù a oa en o-sav diraktañ. Azeziñ a reas el lez-varn ha digoret e voe al levrioù. E oan atav é sellet, e-kreiz gweledigezhioù an noz, ha setu e welis é tonet àr goabrennoù an neañv 'vel ur Mab-Den; donet a reas da gavet an den kozh, ha degaset e voe devatañ. Hag e voe roet dezhañ ar gelloud, ar gloar hag ar rouantelezh. An holl bobloù, broadoù, parladoù a zas d'er servijiñ. E c'helloud a zo ur gelloud peurbadel ha na dremenno ket ; hag e rouantelezh ur rouantelezh na vo biken distrujet.

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

## Psalm 88 : Aotrou, C'hwi eo hor Roue,

**An uhel-meurbet àr an douar a-bezh.**

An Aotrou a ren ! Ra drido an douar,  
levenez en inizi niverus !

Koumoul ha koabren en deus en-dro dezhañ,  
justiz ha gwir a zo diazez e dron.

E luc'hed a sklêrijenn ar bed,  
an douar a wel hag a gren.

Ar menezioù a deuz evel koar dirak an Aotrou,  
dirak mestr an douar a-bezh.

Embann a ra en neñvoù e justis,  
hag an holl bobloù a wel e c'hloar.

Te, Aotrou, eo an Uhel-Meurbed àr an douar a-bezh,  
kalz uheloc'h eget an holl zoueoù.

## Eil lennadenn : Lennadenn tennet a eil lizher S. Pier.

Mam Breuder : N'eo ket diàr sorbiennoù savet kaer hon eus-ni roet deoc'h da anavet gelloud ha donedigezh hon Aotrou Jezuz-Krist, met diàr ar pezh hon eus gwelet, nimp, get hon daoulagad hag a zo bet test d'e vrasted. Aze e oamp pa resevas enor ha klod get Doue an Tad, pa zas àrnañ a splannder e c'hloar, ar vouezh-se a lâre : «Hemañ eo ma mab a garantez. Getañ emañ ma holl plijadur.»

Ar vouezh-se hon eus he c'hlevet, ni hon-unan, é tonet ag an neañv, pa oamp àr-un-dro getañ àr ar manez santel. Evel-se emañ kreskaet ennomp hor fiziañs e komzoù ar brofeted, ha mat e rit teurel evezh dezhe 'vel doc'h ur goulou é lugerniñ en ul lec'h teñval betek ma tarzho an deiz, ha ma savo steredenn ar mintin en ho kalonoù.

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Aviel : Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : **R/ : Ha get ho spered.**

Ar beleg : Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Mazhev.

**R/ : Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !**

C'hwec'h devezh diwezhatoc'h, Jezuz a gemeras getañ Pier, Jak ha Yann e vreur, hag o c'hasas en ul lec'h distro ar ur manez uhel, ha dirakte eñ a zas da vout 'vel un den arall. E fas a lugernas 'vel an heol hag e zilhad a zas da vout gwenn 'vel an erc'h.

Hag en un taol, int aet ha gwelet Moiz hag Eli é teviz getañ. Neuze Pier a lâras da Jezuz : «Aotrou, na kaeret eo deomp bout el lec'h-mañ ; mar karit eh aomp d'ober amañ teir koban : unan deoc'h-c'hwi, unan evit Moiz hag unan evit Eli.» E oa c'hoazh é komz pa zas ur gogusenn lugernus hag o goloet, hag ur vouezh a lâras a greiz ar gogusenn : «Hemañ eo ma mab a garantez. Getañ emañ ma holl plijadur. Selaouit-eñ.» É klevet ar vouezh-se, an disipled a gouezh àr o zal doc'h an douar, ha daet aon bras dezhe. Met Jezuz a dosta, a laka e zorn àrnezhe hag a lâre : «Savit, ha n'ho pezit ket aon !» Sevel a reont neuze o daoulagad, met ne welont den ebet, nemet Jezuz e-unan. 'Vel ma tiskennent a-ziàr ar manez, Jezuz a roas dezhe ar c'hourc'hemenn-mañ : «Na gomzit da zen ebet ag ar pezh ho peus gwelet betek ma savo Mab-an-Den a-douez ar re varv.»

Setu Komz an Aotrou : **Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !**

Kredo : Credo in unum Deum. Patrem omnipotentem, factorem caeli et terrae, visibilium omnium et invisibilium. **Et in unum Dominum Jesum Christum, Filium Dei unigenitum.** Et ex Patre natum ante omnia saecula. **Deum de Deo, Lumen de Lumine, Deum verum de Deo vero.** Genitum non factum consubstantialem Patri, per quem omnia facta sunt. **Qui propter nos homines et propter nostram salutem descendit de caelis.** Et incarnatus est de Spiritu Sancto ex Maria Virgine, et HOMO FACTUS EST.

**Crucifixus etiam pro nobis sub Pontio Pilato, passus et sepultus est.** Et resurrexit tertia die secundum scripturas. **Et ascendit in caelum, sedet ad dexteram Patris.** Et iterum venturus est cum gloria judicare vivos et mortuos, cujus regni non erit finis. **Et in Spiritum Sanctum, Dominum et vivificantem, qui ex patre Filioque procedit.** Qui cum Patre et Filio simul adoratur et conglorificatur, qui locutus est per prophetas. **Et unam sanctam catholicam, et apostolicam Ecclesiam.** Confiteor unum baptisma, in remissionem peccatorum. **Et exspecto resurrectionem mortuorum.** Et vitam venturi saeculi. **Amen !**

## Pedenn hollbedel : Aotrou, hon Doue, ô Tad Santel, selaouit hor pedenn !

Lid ar profoù : ar beleg : Pedit, mam breuder, ma plijo get Doue an Tad holl-gelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :

**R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.**

## Prefas :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

**R/ : Ha get ho spered !**

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

**R/ : Emañ troet trema Doue !**

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

**R/ : Just ha santel eo !**

## Santel : Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr ar bed !

Lan eo get ho kloar an ne hag an douar : **Hosanna e lein an ne !**  
Benniget an hani a za e anv Doue : **Hosanna e lein an ne !**

Gorreoù : **Degas 'reomp da soñj ag ho marv,  
Aotrou Krist savet da vev,  
Ha gortoz a reomp ho tistro.**